

AR FULENN

kelaouenn
diabarzh
SKOL
AN
EMSAV

Skrivañ da : Mikael BAUDU - RANN AN DIABARZH
3, bd du Colombier -ROAZHON

AR FULENN NIVERENN 70
Yaou 9 a viz Here 1980.

TAOLENN

- I. - RENTA-KONT EMVOD AR C'HUZUL REN (28 A VIZ GWENGOLO 80)
- II.- RENTA-KONT RANN AR C'HELENN HAG AR STAJOU
.Lizher Padrig An Habask.
- III- RENTA-KONT RANN AN DIABARZH
- IV.- RENTA-KONT RANN AN EMBANN
- V. - BUHEZ AR C'HREIZENNOU
. Emvod Meur SAE Kerne Izel (Gwener 19.9.80)
. Emvod diwezhan kreizenn Roazhon (Merc'her 1añ .10.80)

EMVOD A ZEU AR BUREV (P.S.) A VO DALK'HEZ D'AR SADORN 25 A VIZ HERE - DA 10 EUR BEURE - (ma fell deoc'h vefe gwelet poent-mañ poent, kasit kelou da Rann an Diabarzh) -



krediñ stourm - krediñ trec'hiñ

B- AN EMBANN :

a-Lom : n'eo ket bet kemeret ur staliad gant tout ar c'hreizennoù. N'eus ken 'met Roazon ha Kemper o deus graet betek-hen. Dav 'vo ober bruderezh da vare **NEDELEG**. Nac'het eo bet prenañ ur staliad gant Diwan-Kreiz. Gwerzhet 'vo neuze war-eeun d'ar skolioù. Dav eo da bep kreizenn tapout ur staliad levrioù ha gwerzhañ anezhe.

b-levr gerioù-kroaz : Prest eo. Met n'eus ket arc'hant evit embann anezhañ evit ar mare. (klasket 'vo hen ober araok nedeleg memestra.)

k-Levr kanaouennoù : Boulc'het mat eo al labour. Met dav 'vo gortoz un tamm evit embann anezhañ (n'eus ket arc'hant ken).

d-Levr bruderezh : pennad Lukian 'zo achu. Gortozet e vo 'vefe achu ar peurrest.

e-Skritelloù PELLGOMZ : ne servij da netra spegañ seurt skritelloù ma ne glasker ket asambles mont e-darempred gant ar sindikajoù hag ar pennadurezhioù. Roll Rann an Diavaez an hini eo. Dav 'vefe prientiñ un dra bennak war an dachenn-mañ evit ar C'huzul Ren eta. Ar re neus soñjoù a rank sevel ur skrid. Ret e vefe ivez kaozeal diwar-se 'barzh ar c'hreizennoù.

f-Trakt ar c'h CRIDEV diwar-benn an Apartheid : Paeet 'vo gant ar c'hCRIDEV. Skignet 'vo ganeomp ur mil skouerenn bennak a vefe da gas en-dro c'hCRIDEV.

g-Kenstrivadeg bannoù-treset : n'eus bet ken 'met ur vandenn. Kinniget 'vo da yod-kerc'h evit ma vefe embannet.

h-Deiziataer 81 : hervez Kirill Giraudon e vefe prest. Glas-gwer 'vo ar golo plastik. Met n'eus den ebet na deus Rann an Embann na deus ar C'huzul neus gwelet anezhañ. A-hervez e vo kaset deomp ar facturenn hep ma vefe bet gwelet al labour a-raok. Mont a raio Jil da welout al labour graet 'barzh ti ar mouler. Laret 'vo dezhañ n'eo ket mui kiriek Kirill en anv Skol an Emsav evit embann an deiziataer. A-benn bloaz e vo graet gant Rann an Embann. Tangi ay da welet Kirill evit komz eus se.

i-bremañ : koust a ra tro 3000, 3500 lur embannadur un niverenn. N'eus ket trawalc'h a-zanvez ! Dav e vo kavet un den 'barzh pep kreizenn evit roiñ 5 eurvezh ar miz, 3 eurvezh evit sevel pennadoù ha 2 eurvezh evit skignañ ar gazetenn 'barzh ar staliou. Mont 'ray penn an Embann e darempred gant ar c'hreizennoù.

Graet e vo karnedoù-koumanantiñ. Mont 'rimp e darempred gant Evid ar Brezhoneg evit ma vefe graet bruderezh 'barzh evit "bremañ" deus un tu, ha deus an tu all e vefe klasket gwerzhañ E.A.B. d'hon skolidi.

Goulennet 'vo ur plas-labour a dalvoudegezh publik evit implijout un den oc'h ober war-dro "bremañ".

j-Levr despugnerien Bro-Dardoup : paeet 'vo frejoù an O.S.C.R. (moulañ) gant an despugnerien. Skol an Emsav a breno pep levr 6,5 lur gant an despugnerien (gwerzhet 'vez 10 lur pep levr). Dasparzhet 'vo al levrioù hag ar c'hasedigoù gant Yann Meur 'barzh pep kreizenn.



II. - RENTA-KONT RANN AR C'HELENN (kinniget d'ar C'huzul-Ren en Oriant)

A- LIZHER A-BERZH PADRIG AN HABASK :

Setu un nebeut kinnigoù evit Rann ar C'helenn, dibabet am eus labourat enni dre ma 'z eus ezhommoù spontus ha dre ma 'z eo ret cheñch penn d'ar vazh, cheñch politikerezh yezhel Skol an Emsav a-raok ma vo re ziwzhat.

Setu 'ta ma doare da welout an traoù : n'eus ket e Skol an Emsav a bolitikerezh evit ar yezh ha n'eus ket kennebeut a bolitikerezh yezhel war-eeun. N'eo ket hepken ar youl vat hag an emroùsted a lakay hor yezh en he flomm en-dro. Ezhomm 'zo a varregezh hag a dud stummet da gas war-raok politikerezh ar yezh en hon touez. Niverus tre eo ar mankoù e-touez izili SAE. Ne oa ken sellout ouzh Dael SAE pe gentoc'h selaou an dud evit merzout e oa gant kalz anezho ur yezh displeberet c'hwez ar galleg ganti, evit lod gant an troioù-lavar amprestet war eeun digant ar galleg, evit lod all ar pouez-mouezh plat, plaen ha divrezhonek a-grenn hag evit lod all c'hoazh gant an daou si asambles.

N'eus tu da stourm evit ar yezh hep komz mat ar yezh, koulz eo mont da strkal brulu... Nann, kement-mañ a zo sklaer hag a zeu eus un dra hepken, kaer o deus bet an emsaverien en em zrailhañ war gudenn ar yezh skrivet n'o deus morse termenet politikerezh ebet evit an doare-komz. War-lerc'h tabut an doare-skrivañ hag a zo dic'hwezhet spi am eus, e fell din diazezañ ur politikerezh eus an doare-kaozeal.

Kement-mañ en dije dleet bezañ graet pell'zo met danvezioù'zo ne stoker ket outo e-giz ouzh mein direnket en ur c'hleuz a vefe en arvar da lakaat pep tra da zisac'hañ ma stoker outo.

Ma ! Ret eo kenteliañ "un" doare-komz da lavarout eo ret echuiñ da viken gant ar vrezhoneg fall, n'eo ket brezhoneg tamm ebet, n'eo nemet galleg fallwisket gant pozioù brezhoneg. Evit distagañ reizh ar yezh ha komz brezhoneg mat, pezh a zo ar c'hammed kentañ e n'eus forzh pe yezh vev (ar gomz a zeu a-raok ar skrid hag hemañ diwar homañ) eo ret tapout sonerezh ar brezhoneg er skouarn ken e-keñver an taol-mouezh er gerioù, ken e-keñver ton-mouezh er frazenn. N'eus netra divrezhonekoc'h eget parlant ponner tud 'zo a striv da lakaat evel gant un horzh an taol-mouezh war un eil-silabenn diwezhañ en ur zerc'hel d'ar frazenn he linenn eeun ha gallek-rik. Ar c'hemmadurioù, desket evel ur redi a zo un dra droch, koulz stlepel kuit pep tra ma ne adkrouer ket sistem komzet ar yezh (liammañ-gerioù, berradurioù, kemmadurioù h.a...) Tremen poent eo eta diazezañ ar politikerezh da lakaat an dud da gaozeal reizh ar yezh.

Petra eo kaozeal reizh avat ?

Tud 'zo a zistag mat-tre ar brezhoneg standard ur brezhoneg etre, liv ha blaz ar yezh gantañ hep ma vefe hini rik ebet eus ar (+) "rannyezhoù". D'an darn vrasañ a zeskarded avat e vo ret ha pa vefe evit komz mat ar yezh standard, tapout mat doare distagañ ur rannyezh bennak.

An diazez eo kement-se, evit tremen eus sistem komzet an dud hag a zo hini ar galleg da hini ar brezhoneg e ranker o soubañ en ur rannyezh bennak, e distagadur ar vro-mañ-bro, n'eus hent all ebet, ret eo evit koll ar galleg soubañ e mor ar brezhoneg ha n'eo ket arvestiñ ouzh ar mor-

se a-bell. Kement-mañ n'eo ket mont war rannyezhekaat tamm ebet, bout gouest da gomz rik evel an dud eus ar c'hornad-mañ-kornad a zo ur gwarant a yec'hed evit ar c'henvrezhoneg, ar brezhoneg standard a ziwan p'en em gav brezhonegerien liesseurt asamblez. Komz mat gwenedeg, kerneveg, Tregerieg pe Leoneg a zo ar bazenn ret da vont davet ar brezhoneg-etre komzet-mat. Ar brezhoneg etre-se a zo ret kaout, a c'hell bezañ liv kerne, gwened, leon pe treger warnañ diouzh an dud a raio gantañ ne ra forzh, ret eo d'an dud kaout un diazez asur hag an dra-se betek-henn n'o deus ket anezhañ.

Evit tizhout ar pal-se e ranker cheñch meur a dra ; labourat muioc'h-mui gant ar vrezhonegerien a-vihanik ; derc'hel soñj mat ez eo ret d'an dud bout perokeded speredek a-benn deskiñ ar yezh met perokeded memestra.

Evit an doare-kelenn ez eo ret deskiñ yezh ar vro mat-tre bep tro ma vo kelennet ar yezh e Breizh-Izel. Gouzout anezhi ha kompren penaos e ya en-dro. Ret e vo kaout eta sonenrollerioù, labourat gant enrolladennoù eus tud ar vro, lakaat da adlarout da drevezifiñ h.a... Labourat ar muiañ posubl e darempred gant tud ar vro.

D'an eil e ranker ober muioc'h-mui a stajoù war ar maez e pevar c'horn ar vro evit an dud a oar madik dija yezh ar vro ma vo graet hag a zo gouest d'en em zibab ganti. A-hend-all e vefe ur c'holl amzer hag ur c'hwitadenn hep ket a var. Bezañ gouest d'ober gant o yezh gant tud ar vro, kaozeal ganto hep tremen da istrogell, setu an arnodenn a dalvoudegezh nemeti a zo da dremen e Skol an Emsav.

Petra larferc'h c'hwi diwar-benn tud o deus desket saozneg e-pad hir vloavezhioù hep morse mont d'ur vro saozneger bennak ? Ha gouzout a reont saozneg ?

Tamm ebet, tra ma n'o do ket bet ezhomm eus ar yezh-se evit bevañ war ar pemdez ne ouezint ket anezhi. Anez dezho bezañ bevet en ur gumuniezh saozneger e-pad ur pennad-mat ne ouiint ket ar yezh.

Heñvel eo evit ar brezhoneg : ma ne ya ket an danvez-brezhonegerien da vevañ gant an dud a ra a-viskoazh gant ar yezh, gant legaderien hon zefizor istorel ne vint morse brehonegerien.

Ar pezh a ginnigan berr-ha-berr eo boulc'hañ labourioù war fonetik hor yezh, doare distagañ reizh h.a., war an tremen eus ar yezh skrivet (peurunvan) d'ar yezhoù komzet hag ar c'hontrol.

-kinnig a ran e vefe labourer dre gomz da gentañ evit an deskarded, hag an enrolladurioù savet gant brezhonegerien a-vihanik.

-Kinnig a ran reiñ buhez da stajoù war ar maez a-hed ar bloaze, estreget stajoù zoken e vefe pouezus ivez kavout labourerien-douar prest da zegemer tud a-hed ar bloaz.

Ret eo cheñch an doare kelenn ivez, stummañ kelennerien h.a... evit ma vo frouezhusoc'h ar stajoù hag ar c'helenn bloaz eo ret sevel programmoù da vezañ heuliet ken er c'hentelioù-noz ken er stajoù. Kement-mañ n'eo ket evit lazhañ intrudu ar gelennerien hogen evit bezañ sur ez aio an deskarded war-raok tamm-ha-tamm diouzh ar programm prientet-mat.

Ret e vo d'am soñj sevel ivez un hentenn all da zeskiñ brezhoneg pe gentoc'h un adhentenn rak daoust da "vbrehoneg buan hag aes" bout ur benveg-labour dispar (da lakaat da glotañ gant brezhoneg ar vro diouzh ma vez) e vefe ret kaout ivez un hentenn vat nevez ha plijus, dre sellet ha klevet diwar skouer ar re savet e Kembraeg...


Kalz bevoc'h e vefe kaout harp un istor dre ziapozitivoù

gant istor paotred ha merc'hed ur familh, ur metoù kevredigezhel eget kaout nemetken ur skeudenn dre gentel. Evit pezh a sell ouzh metod an Du hag ar Berre e vefe tu ober anezhañ "ar brezhoneg war ar maez e kant vloaz" ha c'hoazh gwall ziglok e vefe, da zisteurel eta. Hir a-walc'h ma zisplegadenn m eus aon met setu 2 venoz pennañ ur wech c'hoazh :

(+) Pa gomzan eus rannyezh e ran gant ur ger anavezet hag a zo faos memestra. N'eus ket 4 rannyezh e brezhoneg met mil-ha-mil rannyezh ma klasker dre ma tremener tamm-ha-tamm, lakaomp eus ur stumm yezh kentoc'h kerne d'unan all kentoc'h Gwened gant kemmeskoù. N'eus ket eta eus ar 4der Rannyezh en ur ster strizh.

Sonenrollerioù ha stajoù war ar maez setu alc'houez nemetañ ar brezhonekadur.

PADRIG AN HABASK.



B- MIZ DU S.A.E. :

- n'eus bet staj ebet e miz eost.
- .Staj Skaer skoliad ebet
- .Staj Treglonoù : Oaled Diwan ne oa ket da Ziwan c'hoazh
- .Staj Gwenedeg : re dreut niver ar skolidi
- .Staj Mellag : kenaozet gant Etudes et Chantiers dreist holl. Madig awalc'h eo bet an traoù.

K- RENTA-KONT RANN AR C'HELENN HAG AR STAJOU (divizoù ar 27.9.80)

Klask a raimp lakaat war ar pleustr kinnigoù Padrig an Habask, n'int ket nevez anezho, lezet da vreinañ ne larant ket.

AR STAJOU :

Da vare Pask : posubl 'vo d'ar c'hreizennoù fardañ stajoù-yezh 'giz e vezent graet betek-henn. Ur staj all a vo ne vefe ket fall da Skol An Emsav kemer perzh e-barzh : troiñ (doubliñ) tresadennoù bev en ur deskiñ ar mod d'ober. Deus ar merc'her 8 betek 13 a viz Ebrel 81. Dav eo eta hastañ buan 'benn kas ar muiañ stajidi ar gwellañ 'vo.

Da vare 'n hañv : staj evit sevel ur wenodenn e bro-Plin hag ul levrig evit heñchañ 'n dud warni. Fardet vo ar staj gant SIVOM Lanruen hag Etudes et Chantiers. Perzh Skol An Emsav 'barzh an afer-se 'vefe embannadur al levrig. Plasoù 'vo evit 20 den e-pad 20 devezh, brezhonegerien anezho ha goude-se 4 den